

MEZ E BAROUZ (Sebastopol)

EUR VARDEL A DRO VEL AR VIEL

VOAR AN TON DANSAL

Me c'hanve eur Vardel evel na weler ket.
Vel ar c'hok war an tour, pe vel eur gilouet,
A neus dalc'het da drei, ebars en pep koste,
A na war ken pegoulz alarr ar wirione.

Da gentan c'hoantaez frotan kein an noblañç.
Par ver hep consianç, na ve kamet tam chañç.
Monet ra da Frosdhorf, da welet ar Roue :
War arc'hant an noblañç a rez kalz a goue.

Eun de c'haez d'ar bresel; gout a ouzoc'h ze oll.
Damantuz d'he groc'hen, pini n'oulê ket koll,
An fonç ar vatimant krenê e oll vemprou.
Darn a fell d'he laret a rez an he vrago!

Retorn a rez en Franç goloët a lore :
Servij an Impalaer, a gouelet ar Roue!
Neuze e c'hoantaez, bean republiken :
Batisset war an aël, ezet a teu a ben.

Skrivan ra ar journal a neubet a *Progrê*.
Hag evan boutaillat, arog mont d'he woele.
Goelet a rer ar vad na ra ket pinijen,
Ha trei a ra sivoaz deuz a lezen gristen.

Neuze c'he bet kaset a mez euz e gontre,
Evit c'hessa gouelet ag hen a vûrache!
Vel ar c'hoz kontelio a teuaz war e c'hiz :
An oustil ken diez, gantan buan wer skuiz.

Eun de c'ha da Dinan, e blaz wa ti 'rzodien
Essaët evel Judas treitouri beleien.
Ar Republikanet oc'hunan a lare :
N'eller jamez fiout ebarz tud ar sort ze.

Potret ru Montroulez n'oullont ken anezan
A reo Lanhuon a neuz mez dioutan.
E grede kouskoude a vije Deputé :
Diwar plauken ar jeu c'he ruzet a goste.

Na neuz ket pel amzer a skrivaz eur levr plat.
Kredi re a dra zur c'he da dapout ar c'hat!
O klask ar vaz escop war e fonc e kouet!
Bec'h a vo palastri, elec'h ma c'he bloncet.

Lar ta dime breman petra teuz goneet,
O klask tapout ar loar ag ive ar steret.
Goueloc'h a spije graët, ober mad ta dever,
Ha meulin da Doue en pad an oll amzer.

Ma welez da skeuden ebarz ma c'hanouen
Me gred a rafez mad dont da chanj a gorden,
Chanj a gren a vue, a dond war an end mad.
Ma rafez pinijen neket re divezat.

EUR MASONER KOZ.